

An hini goz

Hag an hini yaouank

pe Breiz ha Bro-Hall¹

An hini goz
Eo ma dous ;
An hini goz
Eo zur !

Ha koulskodue, war a welan,
An hini yaouank ar vravañ,
An hini goz, etc...

An hini yaouank a zo koant ;
An hini goz he-deus arhant ;
An hini goz, etc...

Me n'ez an morse d'ar marhad,
Na ro din-me boutailad ;
An hini goz, etc...

An hini goz am hundu mad ;
An hini goz a zo d'am grad.
An hini goz, etc...

Ha koulskoude e-bazr e kêr
An hini yaouank a garer :
An hini goz, etc...

An hini yaouank 'zo ker plomm !
An hini goz 'zo 'n tammig kromm.
An hini goz, etc...

An hini yaouank az o lijer ;
An hini goz a zo pounner ;
An hini goz, etc...

An hini goz he-deus bleo gwenn ;
An hini yaouank bleo melen.
An hini goz, etc...

An hini goz, liou raden seh ;
An hini yaouank, liou an erh ;
An hini goz, etc...

Liou an erh eo, hag hi ker yen,
Ne ra 'gozig euz zell ouzen² !
An hini goz, etc...

Ha koulskoude n'ouzon perag
Ma halon 'ra tik-tak, tik-tak.

¹ Breiz ha Bro-Hall : notenn e-barz al leor orin : Cette célèbre chanson allégorique, qu'on imprime ici pour la première fois en entier, respire des sentiments de rivalité nationale qui, grâce à Dieu, n'existent plus.

² Ne ra 'gozig euz zell ouzen : ne ra hogozig eur zell ouzin.

An hini goz, etc...

Tik-tak a ra ma halon baour
Pa'z an da skei war doull an nor.
An hini goz, etc...

Teh alese ! teh kuit ! teh pell !
An hini goz a zo kant gwell !
An hini goz, etc...

An hini goz a zo kant gwell ;
Ne ar ket taillou dimezell ;
An hini goz, etc...

Diaket an dimezelled,
Diaket e tri rann ar bed³.
An hini goz, etc...

Dimezelled ne reont bepred
Nemed goap ouz ar Vretoned.
An hini goz, etc...

Pa daolan war bern he glin,
An hini goz a hoarz ouzin.
An hini goz, etc...

An hini goz 'zo Bretonnez,
An hini yaouank 'zo Gallez.
An hini goz, etc...

Fae eo gand ar Gall brein,
Gand krohenn an diaoul war e gein !
An hini goz, etc...

Fae eo gand ar Hallez ;
Ganti karnou en he botez !
An hini goz, etc...

Goude tri deiz⁴ e skuiz peb den
Gand glao, avel ha merh estren.
An hini goz, etc...

Mar komzit a vriedelez
Komzit din euz ar Vretonnez.
An hini goz, etc...

Ne lakin van pa vo laret
Eo ar Vretonnez gwrahellet ;
An hini goz, etc...

Evitañ da voud gwrahellet,
An aval blaz fall n'en-deus ket.
An hini goz, etc...

³ Notenn el leor orin : l'Amérique n'était pas encore découverte.

⁴ tri deiz : tri devez.

Bezef droug gand neb a garo,
Trohet an ed, dornet e vo.
An hini goz, etc...

Bezef droug gand neb a garo,
Ma doue ha me ni eureujo ;
An hini goz, etc...

Ni 'gousko en eur gwele kloz,
War ar pell fresk, bemnoz, bemnoz.
An hini goz, etc...

Na pa ve ker koz hag ar bed,
Ganin e vezo gwalennet.

An hini goz,
Eo ma dous,
An hini goz
Eo zur !

Bet savet marteze gand Proux.